



309

Kotogotogog

Eur zôn-c'hoariel hag a vez kanet e Plouguin
ha tro-var-dro d'an eureujou

I

Allegretto

Eur c'haner hebken


Adkanet gant an holl



Di - sul me vô pin - vi - dik, Di - sul me vô pin - vi - dik,

Eur c'haner

Adkanet gant an holl



Pa 'm bô pre-net eur ya-rig, Pa 'm bo pre-net eur ya-rig.

Eur c'haner

Adkanet gant an holl



Grag grag grag e - me va yar Ko to go to gog e-me'r'c'hil-log.

Var tòn ar c'houblat I

II

Disul me vô pinvidik, disul me vô pinvidik,
Pa 'm bô prenet eur c'hi, pa 'm bô prenet eur c'hi.

Eur c'haner

Adkanet gant an holl



Aou, aou, aou, e - me va c'hi, grag, grag, grag, e -

Eur c'haner

Adkanet gant an holl



me va yar, ko to go to gog e - me'r'c'hil - log.

III (1)

Disul, me vô pinvidik,
P'am bô prenet eur c'hazig.
Bismignaon, eme va c'haz,
Aou, aou, eme va c'hi, etc.

(1) Ar c'houblad-man hag ar re a deu d'e heul a vô kanet er memez doare gant an daou genta. Ne vô ken diezant nemed gant an trede poz eus peb hini anezo, rag neuze ar mestr-kaner, hag an holl var e lerc'h, a ranko henvel eul loan muioc'h bep taol, en eur vont var ar c'hiz : eno ema ar c'hoari ; eno e vô an abaden, ha kalz a vô lakeat nec'het araok ma vô ar mare da gana : Kotogotogog, eme 'r c'hilhog.



IV

Disul, me vô pinvidik,
 P'am bô prenet eur marc'hig.
 Ouin, c'hin, c'hin, eme va marc'h,
 Bismignaon, eme va c'haz, etc.

V

Disul, me vô pinvidik,
 P'am bô prenet eur vioc'hig.
 Man, man, man, eme va bioc'h,
 Ouin, c'hin, c'hin, eme va marc'h, etc.

VI

Disul, me vô pinvidik,
 P'am bô prenet eur maoutig.
 Bè, bè, bè, eme va maout
 Man, man, man, eme va bioc'h, etc.

VII

Disul, me vô pinvidik,
 P'am bô prenet eun doc'hig.
 Oc'h, oc'h, oc'h, eme va doc'h,
 Bè, bè, bè, eme va maout, etc.

— 63 —

VIII

Disul, me vô pinvidik,
 P'am bô prenet eur wregig.
 Hi, hi, hi, eme va gwreg,
 Oc'h, oc'h, oc'h, eme va doc'h,
 Bè, bè, bè, eme va maout,
 Man, man, man, eme va bioc'h,
 Ouin, c'hin, c'hin, eme va marc'h,
 Bismignaon, eme va c'haz,
 Aou, aou, aou, eme va c'hi,
 Grag, grag, grag, eme va yar,
 Bè, bè, bè, eme va maout, etc.